

Cantique à St. Etienne chanté au cours de la procession  
au Parson de la Madeleine à Penmarc'h.

8N2-3-002

# DA ZANT STEPHAN

Ton : *Lili arc'hanted.*

## DISKAN :

O Sant Stephan euz an envou  
Klevit hirie hor pedennou,  
Grit ma skignimp hano Jezus  
Hag he lezen karantezus.

### I

Stephan gwechall c'houi a zo bed  
Gant an ebstel dibabed  
Evit beza hor skoazeller  
Hag ar c'henta avieler.

### II

Eneb an Iliz o sevel  
Buhan e tirollaz brezel :  
Stephan c'houi gutuillaz en-hi  
Kenta bleun ar verzerenti.

### III

Iliz Jezus a zo bepred  
Goasket e pevar c'horn ar bed :  
En ho merzerenti Stephan  
O peuz bed breudeur heb ehan.

### IV

Goad ar verzerien en Iliz  
A gouez bevus evel ar gliz :  
Seul vui e red seul vui e ren  
Seul vui e tiouan kristenien.

### V

Stephan en hor poaniou hir-lemm  
Deskit deomp holl gouzaonv heb klemm :  
Ar groaz eo alc'houez aour an env  
Grit m'hen dougimp nerzus ha krenv.

